

# O Anna, Mamm Mari


Sta48-1

$\text{♩} = 60$



O An - na, Mamm Ma - ri, a ga - lon ni ho ped.

5




5 Doh peb droug gouar - net ni, groeit ma vem oll sal - vet!

9



9 1 En am - zér - hont, en dud her bed e oé heb peah heb leu - i - né,

13



13 en o spe - red meid ti - oal - ded én o ha - lon na - meit tris - té.

O ANNA, MAMM MARI, HA GALON NI HO PED,  
DOH PEB DROUG GOUARNET NI, GROEIT MA VEM OLL SALVET.

- 1- En Amzér-hont, en dud ér bed e oé heb peah, heb leuiné,  
En o spered meid tioleted én o halon nameit tristé.
- 2- Er Judé neoah daoud bried, Joachim hag Anna, e viùé,  
ged karanté hag avisted én ur sentein doh lézenn Doué.
- 3- En o ziegeh eurus meurbed, ne vanké meid ur joé heb kin :  
N'o devoé bet krouédur erbed ha kouhad e hrent get hankin.
- 4- O daou atao d'en Aotrou Doué gredus é larant o goulenn,  
Un El érfin e lar dehé é ma cheleuet o fédenn.
- 5- Chetu ganet er hrouédur glan, biskoah ne vo hanval doh-ti,  
Gréseù a-leih én hé inéan, ganet é er Werhiéz Vari.
- 6-Joachim, Anna,um rejoeiset, reit zo deoh ur hrouédur hep par,  
Ho merhig e zo beniget, dreist en oll dud zo ar en douar.
- 7- Saùet ho penn ged leuiné, tud ag en douar, ne ouilet ket,  
Rag a pe splann er goleu-dé e ma tost en héol de zoned.
- 8- Er verhig-man e zo choéjet, de voud Mam de salvér er bed,  
Ha ged en oll é vo anùet, rouanéz en dud hag en Eled.
- 9- O Mari, rozenn mistérius, nen des énnoh meid braùité;  
Stirenn dreist en oll lugernus, hui e zigor splandér en dé.
- 10- Santéz Anna, inour deoh-hui, ar en douar èl é lein en né,  
Inour eué d'ho merh Mari, gwerhiez berped ha Mamm de Zoué.